


GORSEDD



Treset gant Per Kadr (Er Blei) barz a Enor.

REIZADUR

(PEDERVED MOULADENN)

—
1937

EXPOSÉ FRANÇAIS

Qu'est le " Gorsedd " ? Que sont les Druides, les Bardes, les Ovates ?

En Gaule, en Grande-Bretagne et en Irlande, il existait une caste de philosophes, de lettrés, de médecins, qu'on désignait sous le nom de druides, de bardes et d'ovates.

Dissoute par les Romains, puis absorbée par le Christianisme, la caste, dans sa forme et son esprit primitifs, a disparu définitivement.

Mais, comme sur une souche qui reste en terre poussent après un long temps des baliveaux, sur le thème de l'ancien druidisme, les Gallois ont reconstitué au XIV^e siècle une institution qu'ils ont appelée de son ancien nom : Gorsedd (*Gor*, sur ; *Sedd*, siège, haute-assise), en laquelle ils ont groupé les intellectuels de leur petite nation.

Les Bretons de France constatèrent, vers le milieu du XIX^e siècle, la lacune d'un semblable groupement dans leur pays. S'il avait existé, leur langue n'eût pas été en péril d'extinction. Autour de La Ville-Marqué, de Le Scour, de Luzel, un certain nombre de poètes essayèrent, vers 1855, de fonder une académie de bardes. Tentative prématurée !

En 1899, une autre génération reprit l'idée à son compte, après une visite au Pays de Galles et une étude des méthodes du Gorsedd des Iles Britanniques. Munie d'une licence en due forme, elle transplanta en Bretagne une branche du Gorsedd, et ses fondateurs déclarèrent l'association, conformément à la loi.

Les statuts furent déposés, et un sévère règlement établit une hiérarchie dirigeante, des ordres, ainsi qu'un costume. Il y eut un grand druide à vie ; un conseil de direction de 12 membres ; des druides, choisis parmi les anciens ; des bardes (poètes, écrivains, artistes, militants de toute obédience) ; des ovates (hommes de loi, médecins, gens du négoce et du travail) ; enfin, des disciples.

De 1900. à 1914, le Collège conquit sa position non sans lutte, en raison de la mésinterprétation forcée de méthodes de propagande choquant des idées reçues. Ses manifestations attiraient cependant la foule, et petit à petit les trois ordres se recrutaient sans hâte. Des notabilités recevaient le titre honorifique.

L'après-guerre, favorable à tous les audacieux, permit l'extension du Collège des Bardes de Bretagne. La liaison reprise, il consolida ses positions et s'imposa, par la réception de personnalités éminentes, à l'attention et à l'hommage des élites. Aujourd'hui, 38 ans après la fondation du Collège, plus de 200 membres, admis à la suite de candidatures ou de sélection, forment, malgré de lourdes pertes dues à la mort des plus anciens, une garde solidement armée autour de la petite nation bretonne et de sa langue (car elle s'interdit d'en parler d'autre).

Ajoutons que l'exemple des Bretons a été imité par les Cornubiens d'Angleterre et les Celtistes de France, qui ont sollicité et obtenu pour leurs pays la permission d'emprunter le nom et les règlements du Gorsedd primitif de Galles.

Les présents statuts comprennent :

1°) Un règlement d'ordre intérieur et de discipline ;

2°) Un règlement du cérémonial de plein air (Gorsedd Digor), au cours duquel les investitures annuelles ont lieu, et qui est l'occasion, comme on sait, d'un festival celtique.



Gorsedd Breiz-Vihan

Ar Gwir eneb d'ar Bed !

REIZADUR

savet en 1900, adrenket en 1909,

hag en 1926.

Anzavet gant ar Pouellgor en Kemperlé

an 12 a viz Eost 1927 ; hag en Alré

an 9 a viz Gwengolo 1928 ;

Moulet evit ar bederved gwech er bloavez 1937.

I. — Eur Skol Varzed a zo bet krouet en Breiz-Izel en 1900, gant aotreadur Houva Mòn, arc'hdroviz Breiz-Veur. He hano a zo « *Gorsedd Gourenez Breiz-Vihan* ».

II. — Frankiz da beb barn a zo lezet gant ezili ar Gorsedd, war bez na sell ket ouz an traou barzek. Hogen ar Gorsedd a zo a du gant ar re a c'houlen evid peb den ar Gwir Boutin. Ar greden da Zoue ha da heurbadelez ar Spered a zo bet a viskoaz hini ar Varzed.

III. — Skol Varzed Breiz-Izel a zo bet diskleriet d'al Lezen, hag anavezet gant Gouarnamant Bro-C'hall, an 23 a viz Du, 1908 (*Journal Officiel*, 18-10-1908).

IV. — Ter urz kevatal a zo er Gorsedd :

1° Urz an Drouized ;

2° Urz an Varzed ;

3° Urz an Oveded.

V. — An oad da veza Drouiz a zo 40 vloaz ; da veza Barz hag Oved, 25 bloaz.

VI. — An Drouized a vez graët diwar gelennerien uhel, beleien, skrivagnerien war danvez an doueëlez, ar speredelez, gant tud gwiziek ha gouarnourien.

Ar Varzed a vez graët diwar rimadellerien, danevellerien,

prezegerien, liverien, kanerien, gazetennerien, sonaderien, kelennerien poblus.

An Oveded a vez graët diwar ijinerien, mezegien, louzaouerien, beajourien, kemwerzerien, micherourien, labourerien douar.

Kement Drouiz, Barz, Oved, a renk kemer eul Lez-Hano.

Ar merc'hed a c'hall beza digemeret er Gorsedd.

VII. — Skol ar Varzed a zo krouet evid maga, derc'hel, adsevel, ar spered, ar c'hiziou hag ar ouenn geltiek ; skignao ar yez, al lennegezh, an ijinou breizek ; diazeza warne Emzao ar Vro ; beza eun ere etre Breiz hag ar broiou keltiek all ; lakaat ar Peoc'h da ren etre Breiziz ; dastum ar *re wella* dindan he beli.

VIII. — An ezili a dle skoazel an eil d'egile : dleet eo d'ezo en em enori en eurvad hag en drougeur.

IX. — Ar Varzed a dle skoazia ar c'hevredigeziou diazevet war eur spered breizek.

X. — E kichen teiz urz ar Gorsedd, ez eus c'hoaz rann an Diskibien a vezo digemeret ennhi an dud troet mat da c'hortoz ober barzed gantê. — Ar dud yaouank dindan 20 bloaz a ve Mabinegien.

XI. — Peb Barz an euz en saë ret d'ezan kaout.

Koulskoude, epad an amzeriou kernez a heuil atao ar brezeliou braz hag an dispac'hioù, ezili ar Gorsedd a vezo aotreet da zougen, e pad al lidoù e leac'h ar saë, eur c'houriz liou gant o urz : gwenn (drouized), glaz (barzed), gwer (oveded).

XII. — Aliet a ver da zougen, pa ve tu, gwiskamant broadel Breiz-Izel.

XIII. — Arc'hdrouiz Gorsedd Enez Breiz-Veur a zo rener evit gwir war holl c'horseddou ar Bed.

XIV. — Drouiz-Meur Gourenez Breiz-Izel a vezo hanvet gant 12 ezel ar Pouellgor dre votadeg skrid, ha gant an hanter hag unan euz ar mouezioù o dije respontet.

XV. — Kargou all ar Pouellgor a zo : Eil-Rener ; Arwez-Varz ; Penn-Varz ; Penn-Oved ; Douger-banniel ; Douger-kleze ; Douger-kornboud ; Douger-kornhirlas ; Douger Laonen ar c'hleze hanteret ; Skoazier ; Gwiskerezh. Ar Pouellgor a c'hoularn ar Skol hag a gemer e zivizou dre an hanter hag unan eus ar mouezioù. Ar vot dre skrid pe dre eun tredeeg a zo reiz.

Kargou padus int, hed ar vuez.

Pa varv eun ezel euz ar Pouellgor, pe pa ro e zilez, ar rê all a zibab unan en e lec'h, etouez ezili ar Skol.

XVI. — A benn beza ezel euz ar Pouellgor, eo ret gouzout brezoneg, ha beza 30 vloaz. En eur zont er Pouellgor, e teuer kerkent da veza Drouiz. Evel arwez euz o c'harg ar C'Huzulerien a zougo war o skoaz deou eur sribillen lietennoù gwenn-glaz-gwer.

XVII. — Renadurezh ar Pouellgor hag ar Gorsedd a zo roet d'an Drouiz-Meur, pe mar be ezvezant, d'an Ezel diskleriet gantan.

XVIII. — Breuriez ar Varzed a zalc'h eur Gorsedd digor beb bloaz, dirak an heol, lagad an deiz, war eun dachenn a wel d'ar bobl, kement ha galloud war eun dol-ven. Diouz ret e c'hall beza dalc'het en eur berc'heniezh mogeriet, tra hini pe hini, war bedadennoù.

XIX. — Breuriez ar Varzed a zalc'h bodadegoù bihan evit delc'hen kuzul, ken aliez ha ma vez ezom. Beb bloaz, derc'hent ar Gorsedd Digor, an holl Varzed en em zastum en Gorsedd Kuz evit en em gleved war al labour graët ha da ober.

XX. — Brezoneg hebken a renk ar Varzed komz er Gorsedd digor pe eur yez keltiek all. Gant aotreadur an Drouiz-Meur an izili-a-enor a c'hall komz o yez c'henidig.

XXI. — A benn beza digemeret da vat, e renker beza tremenet eur bloaz en urz an Diskibien. Hogen ar Pouellgor a c'hall divizout a vezo digemeret, war an tol kenta, tud a vrud vras pe embannet gantê labourioù a bouez.

XXII. — A benn beza digemeret er Gorsedd ez eo ret :

1. Skriva eur goulenn ;
2. Kaout eur spered keltiek ;
3. Gouzout komz, lenn, skriva brezoneg ;
4. Kaout eur vuez a skuer vat ;
5. Beza labourer evid adsevel Breiz dre gomz, skrid, pe oberou ;
6. Toui chom feal d'ar Vro, ha doujus d'ar Gorsedd.

XXIII. — Ar goulennou a vez dastumet gant ar Rener tri miz araok ar Gorsedd digor. Hema o c'haso da ezili ar Pouellgor, pere a zisklerio o mennozh dre skrid : ret a vezo d'ar geder kaout evid beza digemeret eun hanter hag unan eus ar mouezioù

a responto. En kaz a zisparti, hini an Drouiz Meur a dalvez diou.
Ar gederien a vezo kaset kelou d'ezo.

Er Gorsedd kuz a vezo graët araok peb Gorsedd digor, ar
goulennoù a vezo sellet outo eun eil gwech.

XXIV. — An Diskibl c'hoant d'ezan tremen Drouiz, Barz,
pe Oved, a c'houlennno dre skrid.

XXV. — Ezili a enor a vez digemeret er Gorsedd, koulz
paotred ha merc'hed, dre anaoudegez evid ar madelezou o defe
graët da Geltia, da Vreiz, d'ar Vreuriezh.

XXVI. — Ouspenn, evit delc'hen beo an Awen en tiegeziou
barzek a rum da rum, gwragez an Drouized, Barzed, Oveded,
pe mar dint dizemezh, o mam, o c'hoar a vev gante, hag a ble
oute, a c'hall beza hanvet ezili-a-enor euz ar Gorsedd heb
skoden da baëa.

Evit an hevelep mennoz, bugale an Drouidez, Barzed, Ove-
ded, a c'hall beza digemeret Mabinegien eus ar Gorsedd, hep
skoden da baëa.

Eur Paper Testeni a vez roet da bep Ezel.

XXVII. — Ar skoden vloaziek da baëa a zo brema 10 lur.
Ar c'hefier a zo dibabet mesk kuzulerien ar Pouellgor.

XXVIII. — Ar Pouellgor an eus galloud da damall ha zoken
da argas eun ezel er maez ar Gorsedd. Galloud en deus ive da
adkemeret ezili bet diverket, mar dint pardonet.

XXIX. — Peadra ar Gorsedd a zo ennan : kleze bras Arzur ;
kleze daourannet Breiz-Kymru ; banniel bras ar Gorsedd ;
banniel herminiget Breiz ; ar c'horn-hirlas ; ar c'hornboud ;
saeiou ; gourizou ; spilhou ; testeniou.

XXX. — Arc'hant ar c'hef a ya : da zerc'hel e stad vat ar
peadra ; da brena danvez saeioù ha gourizou ; da harpa ar
gouelioù ; da rei prizioù kenskrivadegoù ; da baëa al lizer-
gelc'hoù hag ar mouladennou ret d'ar vreuriezh ; da c'holo
an dispignou a bep seurt ha da skoazella eur c'hevareg ezommek
bennag.

Ar Chefier a zispleg bep bloaz stad ar yalc'h er Gorsedd kuz.

XXXI. — Ar Gorsedd na gemer moulladur levr a-bet war
e goust ; hogen gallout a ra pe rei e aotreadur d'eul levr, pe
d'eun oberians, pe rei d'ezo mennegoù-a-enor da zeiz ar Gor-
sedd digor.

XXXII. — Da heul barn Gorsedd Langollen-en-Kymru e
1908, eo bet divizet « peb barz breizad a vije Ezel a enor eus
Gorsedd Enez Breiz-Veur, hag ar ré-ma ezili a enor eus hon
hini ».

XXXIII. — Drouiz-Meur Breiz-Izel a zibabo entre kannaded
hon bro an hini a zougo an hanterenn gleze pa vezo lec'h da
ober unvaniezh an diou lodenn en eur vro estren bennag.

XXXIV. — Al lidou a vezo kaset en dro evel henn :

War an dol ven, pe an dosenn douar, pe ar menez, e vo an
Drouiz-Meur, an Drouiz Rener, an Arwez-Varz, ar C'hlezeour,
hag ar C'hornboud.

An tosta d'an uhelenn e vo ezili ar Pouellgor hag ar ban-
nieloù.

En drô e vo ar Varzed, an Oveded, an Drouized mesket.

War vevenn ar c'helc'h an Diskibien.

Er maez ar c'helc'h, ar bobl.

REIZADUR A ZIAVAEZ

LIDOU AR GORSEDD DIGOR

Lidou ar Gorsedd digor a dle beza graet, kement ha gallout, d'ar beure, dindan lagad an deiz ha dirak ar Bobl.

Ar Gorsedd eo gouel bras ar Varzed, ha dleet eo d'an holl Izili dont d'al lidou-ma gant o sae varzek, nemet beza o defe eun digare a-bouez evit tremen hep dont.

Lidou ar Gorsedd a vez graet en eur c'hromlec'h a zaouzek peulven, eun dolven en o c'hreiz. Dor ar c'helc'h a vez en tu ar sav-heol, hag an Drouiz-Meur, war ar Men, a vez troet e zremm ouz an tu-ze.

URZ AN AMBROUGADEG

Ar sonerez, sonerien biniou ha bombard, telenourien, trompillou, taboulinou.

Ar Barz Douger Korn-Boud.

An Mabineien daou ha daou.

An Diskibien daou ha daou.

An Oveded daou ha daou.

Ar Barz Douger Kleze.

Eur gwaz o tougen banniel Breiz.

An Dougerezed Uhel-Var hag ar Barz Douger ar C'horn-hirlas, int o daou kevret.

Barzed daou ha daou.

Ar Barz Douger-banniel, hag eur gwaz o tougen ar banniel bras.

Drouized daou ha daou.

An Drouiz-Meur hag an Drouiz eil-rener.

Bagad ar c'hedourien.

An Arouez Varz a ya a-hed al lid-kerz evit hen urza.

Al lid-kerz a arru er c'helc'h keit m'ema c'hoaz ar sonadeg o c'hoari. Ezili ar Gorsedd a gemer o lec'h.

SKEUDEN AR GORSEDD PE KROMLEC'H

Bevenn ar Gorsedd a zo merket gant an daouzek men. Ar Bobl a dle kelc'hia a ziavaez an daouzek peulven hep tostaat d'eze muioc'h eget pemp pe c'houec'h troatad. Evit se e vezo mat lakat eur fun bennag hag evesarien.

Treuz ar c'helc'h en deus war-dro c'houec'h-ha-tregont kammed hed.

RENK AR VARZED ER C'HELCH

1. An Drouiz-Meur.
2. An Drouiz eil-rener.
3. An Douger banniel.
4. An Arouez Varz, a yelo hag a zeuio dioc'h ma vezo ezom.
5. An Douger Laonen hanteret.
6. An Douger Kleze.
7. An Douger Korn Hirlas.
8. Ar C'hornier.
9. Ar Varzed Wiskerez.
10. Drouized all ar Pouellgor.

An Drouized, ar Varzed hag an Oveded en em lak pep hini ouz eur peulven.

Ar diskibien a ve renket etre ar meinhir, oc'h ober bevenn d'ar c'helc'h.

Ar c'hedourien a chom e maez ar c'helc'h mesk ar bobl bete beza galvet gant an Arouez Varz epad al lidou.

An dougerezed uhelvar ouz troad ar men.

DIGORIDIGEZ AR GORSEDD

Ar Barz Korner a zav da genta war ar Men hag a ra eur sonadenn hir war-zu ar pewar avel.

An Drouiz Meur hag an Drouiz eil-rener a zav neuze war ar Men.

Goude ze e vez digoret ar Gorsedd evelhenn : An Drouiz-Meur ;

« Gorsedd Barzed Gourenez Breiz-Izel ! »

« Ar Gwir eneb ar bed ! »

« Doue ha peb Madelez ! »

An Drouiz-Meur a laka ar Gorsedd dindan paeroniezh eur C'helt bennak. Kement ha ma vezo gallet, an uhel-sperejou-ma a vezo dibabet etouez an dud varo ar brudeta er vroig lec'h ma vezo graet ar Gorsedd.

LID AR PEUC'H

An Douger kleze a astenn ar c'hleze uhela ma c'hall, a-dreuz, dirak an Drouiz-Meur. Hema a gemer ar c'houin en e zorn

kleiz hag an dornel en e zorn deou. Ar Varzed a zo holl tostaet, ha kement hini a c'hall hen ober, a stok e zorn deou ouz ar c'houin.

An Douger kleze, a bouez-penn, a c'houlenn neuze dre deir gwech, en eur denna ar c'hleze a hanter eus ar c'houin :

— « Ha peuc'h a zo ? »

Hag an holl Varzed a respont bep tro :

— Peuc'h !

Pep hini a ya neuze d'e lec'h.

PEDEN AR GORSEDD

Eun Drouiz a lavar peden ar Gorsedd :

— « *Aotre d'imp, Doue, da warez,
Ha gant gwarez, nerz,
Ha gant nerz, pouell,
Ha gant pouell, gouiziegez,
Ha gant gouiziegez, dibab ar gwir,
Ha gant dibab ar gwir, e garout,
Ha gant e garout, karout an holl vuhezioù
Ha gant an holl vuhezioù, karout Doue
Doue ha peb Madelez !* »

Kan pe sonadeg.

PREZEGENNOU

An Drouiz-Meur a stag gant ar prezegennoù. Na ankounac'ho ket kas gourc'hemennou da Benn-rener ar Vro, kement-ma evit senti ouz giz koz ar Gorsedd.

Mar zo er c'helc'h eur barz bennak, ezel eus eur Gorsedd a ziavaez, e vezo pedet gant an Arouez Varz da zevel da genta war ar Men evit ober eur brezegenn.

Goude ze e e vezo tro an Arouez Varz evit ober, diouz an digouez, maronad Kenvreudeur maro e pad ar bloaz, pe evit embann maro barzek eun ezel bennak, bet torret en kuzul ar Gorsedd kuz.

Izili ar Gorsedd a zeuio war e lerc'h pep-hini d'e dro. Komz a raint, kals pe nebeut, diouz ma vezo amzer.

Ar brezoneg, pe eur yez keltiek hepken a veza komzet, nemet beza vefe graet al lidou en eur vro lec'h n'eo ket komzet ar vez brezonek gant ar bobl.

Sonadeg.

Mar zo er Gorsedd digor euz c'hannad bennak eus ar Broio. Keltiek, e tigasao gantan war an dolven unan eus laonennou ar c'hleze rannet. Eun Ezel eus ar pouellgor a zigaso al laonenn all hag an Drouiz-Meur o *demezo*, hag a reio gant an diou hanterenn eur c'hleze hepken evit diskouez Unvaniez peurbadus ar Ouenn, hag he youl da stourm ouz hec'h enebourien.

LID AN UHEL-VAR

Douger ar C'horn Hirlas ha Dougerezed an Uhel-Var a bign war ar Men. An Drouiz eil-rener a gemer ar C'horn Hirlas hag an Drouiz-Meur a gemer an Uhel-Var.

An Drouiz-Meur a lavar :

— Arouez ene ar c'hrouadur,

— Louzaouenn pep yac'hadur,

— A ro d'hon spered magadur !

Lakaat e ra an Uhel-var ebarz ar C'horn Hirlas hag e sav neuze ar c'horn dirak ar bobl o lavarout :

— Setu ama ar C'horn-Hirlas a zo bet roet d'ar Vreiziz gant o breudeur a Vreiz-Veur en testeni a garantez peurbadus hag en arouez a beurbadelez vroadel holl Vreiziz ar bed. Ra vezo kazet kement-hini a dostaio d'ezan mar ne vez leun e galon a garantez evit Breiz-Izel, ha mar ne dalc'h ket d'al lê da veza da yirviken eun difennour kalonek d'ar Vro, d'ar Ouenn ha d'ar Yez brezonek. »

An Drouiz-Meur a ro ar C'horn Hirlas d'an Drouiz eil-rener, hag ar bodigou Uhelvar a vez lodennet etre ar bobl.

DIGEMERIDIGEZ AR VARZED NEVEZ

An Arouez Varz a c'halv an holl c'hedourien war eun dro. Ar re-ma a zeu dirak ar Men.

An Drouiz-Meur :

— Barzed Gorsedd Gourenez Breiz-Izel, ha dellezek e kavit an dud-ma da wiska sae ar Varzed ? »

Ar Varzed, holl :

— Dellezek int.

Hini ha hini, goude beza bet galyet gant an Arouez Varz, ar c'hedourien a zav war ar Men evit ober eur Brezegenn verr, a raint enni al le da veza feal da Vreiz, d'he yez ha d'ar spered keltiek.

Goude ar brezegenn an Drouiz-Meur a lavaro.

— « An Aotrou hen-ha-hen en deus dibabet da leshano barzek an hano-man-hano. »

Ar c'horn-boud a dol eur youc'hadenn war zu ar reter.

Da bep barz nevez e vezo graet stoka e zorn deou ouz dornel ar c'hleze ; eur c'houriz liou glas, pe wer, pe wenn a vezo skoulmet en dro d'e vruched gant ar Varzez Wiskerez.

Goude ma vezo diskennet ar Barz nevez diwar ar Men ar Varzez Wiskerez a wisko d'ezan e sae varzek mar ez eus deut unan gantan.

Pa vezo tremenet evel-se an holl varzed nevez, hag int chomet, dirak ar Men, an Drouiz Meur a lavaro d'eze a vouez uhel :

— Barzed ez oc'h eus Gorsedd Barzed Gourenez Breiz-Izel. Ar Gwir eo hoc'h aotrou, ar pouell eo ho mevel. It brema gant hoc'h hent, divalc'h ha diarvar, Breiz 'n ho Spezed, Breiz 'n ho kalon, Breiz 'n ho lavar. »

DIGEMERIDIGEZ AN DISKIBIEN

An Arouez Varz a c'halv an danvez barzed. Ar re-ma a zeu war ar Men d'ober, pep-hini d'e dro, al le da veza feal da Vreiz, d'he yez ha d'ar Spered keltiek ha da oberi evit brasder ar Vro. An Drouiz-Meur a raio da bep-hini, ouz e vrec'h deou, eur skoulm a dri liou ; gwenn, glas ha gwer, ha da bep-hini e vezo graet stoka e zorn ouz c'houn ar c'hleze.

Goude ma vez tremenet an holl Diskibien, an Drouiz-Meur a zav e vouez hag a lavar d'eze :

— « Diskibien ez oc'h eus Gorsedd Barzed Gourenez Breiz-Izel. Dalc'hit d'ho le evit beza dellezek da wiska sae ar Varzed. »

An Diskibien a yelo neuze da gemer o lec'h etre ar meinhir.

DIGEMERIDIGEZ AN IZILLI A ENOR

An Arouez Varz a c'halvo anezo, an eil goude egile, hag o digaso d'ar Men Pep-hini a hallo ober eur brezegenn. Ar brezegenn-ma a c'hallo beza graet en galleg pe en eur yez all.

An Drouiz-Meur a embanno o oberou hag ar Wiskerez a lako eur c'houriz c'hlas en dro d'o askre.

SONIRI HA KANIRI GOUDE.

LENNADEG AN DESTENI

An Drouiz-Meur :

— « Goude beza klevet youl Gorsedd Barzed Gourenez Breiz-Izel ha graet al lidou dleet, me X... Drouiz-Meur Breiz-Izel, dre gemenn Gorsedd Gourenez Breiz-Izel ha digemer Gorsedd Beirdd Ynys Brydain, ama er c'hromlec'h, e kreiz dalc'h broadel Gorsedd Meuleudius Breiz-Izel, evit ar bloa... a gemenn d'an holl Vreiziz eo bet digemeret hizio :

da varz : hen-ha-hen

da oved : hen-ha-hen

da drouiz : hen-ha-hen

dre ma 'z int brudet mad en o buhez ha pa o deus touet lealded d'ar Gorsedd, d'ar Gwir, d'ar Vro, d'hon Giziou ha d'ar Spered keltiek, dirak sklerijenn Doue, sperejou hon Tadou ha meurded hon Gouenn hag ar Gorsedd broadel. Digemerit holl o le evit ma vezint kazet mar torrout anezan. »

AL LIDOU DIVEZA

An Drouiz-Meur :

— Termen ar Gorsedd !

An dougerien banniel en em lak a bep tu hag an holl Varzed en em vod dirag ar Men. Evit an eil tro, e vez graet Lid ar Peuc'h war ar c'hleze.

An Arouez Varz a sav war ar Men hag a zeraou kana « Bro Goz ma Zadou ». An diskan a zo kanet a-unan gant an holl.

Goude ma vez achuet ar c'han, an Arouez-Varz a embann ez eo divez ar Gorsedd evit ar bloa...

Embann a rer ive pezh a vezo graet goude kreisteiz evit didual ar Bobl.

SON AR C'HORN BOUD.

Izili ar Gorsedd a gwita ar C'helc'h en hevelep urz evel ma oant o tont ennan da genta.

Moulet da genta er bloavezh 1907.

Moulet a nevez er bloavezh 1937.

Roll an Ezili

Liste des Membres

DROUIZED AR POUELLGOR (DRUIDES DU CONSEIL)

Fanch JAFFRENNOU (Taldir) Drouiz Meur, Keraez, Kerne.
 Fanch VALLEE (Ab Hervé) Eil Renner, Stred Sant Beneat, Sant-Brieg, Breiz-Uhel.
 Léon AR BERR (Ab Alor) Kornboudier, 4, Stred Fougères, Raozon, Breiz-Uhel.
 Alfred LAJAT (Mab an Argoat) Bannieler, 50, rue Camille-Flammarion, Naoned, Breiz-Uhel.
 Fransez EVEN (Karevro) Douger Uhelvar, Lann dreger, Treger.
 Loeiz HERRIEU (Labourer), Sant-Karadeg, Henbont, Gwened.
 Pol DIVERRES (Tangwall) Pennoved, Llwyn, Sketty, Abertawe, Kemri.
 Nathali de VOLZ KERHOENT (Gwennfrewi) Gwiskerez, Kiberon, Gwened.
 Yann Fransez JACOB (Eflam Koet Skaù) Arwezvarz, 74, rue de la Comédie, Lorient.
 Emil ERNAULT (Barz ar Goued), 14, Leurger Sant Mikael, Sant-Brieg, Breiz-Uhel.
 Doktor Célestin MENGUY, Skoazeller, Keraez, Kerne.
 Iwan TILLENON (Lôuzäouer) Douger Kleze, 4, avenue du Général Maistre, Paris (14^e).

DROUIZED (DRUIDES)

Tad Joseb DUCHAUCHIX (Ronan Kerméné), Person Sant-Martin-de-Bavel (Ain).
 Jul-Marcel GROS (Ab Alan), 38, rue des Chantiers, Versailles, Bro C'hall.
 Philéas LEBESGUE (Ab Gwenc'hlan), La Neuville-Vault (Oise), Bro C'hall.
 Loeiz BERANGER (Talhouarn), 6, rue des Frères-Prêcheurs, La Rochelle, Bro C'hall.
 Eugène WESANDER (Aodh), 7, Stanley Gardens, Hampstead, London, Bro-Saoz.
 Ralph ALLIN COLLINS (Halwyn), 140, Fenchurch Street, London, Bro-Saoz.
 Yann MOFFAIT-PENDER (Mab Perinaik), Stornoway, Enez Lewis, Bro-Skos.
 Euzen REGNIER (Bleiz-gouez), 75, rue de Fougères, Raozon, Breiz-Uhel.
 Abed Yann-Per CARIO (Ab Tudal), Aluzenner ar Varzed, villa Sainte-Barbe, Le Faouët (M.).
 Marquis DE L'ESTOURBEILLON (Hoël Broerek), maner, Avessac (Loire-Inférieure).
 Charles ROLLAND (Roll Diroll), Guerlesquin (Finistère).
 Seton GORDON (Sualaire), Duntuilin, Enez Skye, Bro-Skos.
 Hollsent AR GARREC (Ar Barner), 2, rue de Poullanc, Morlaix (Finist.).
 Per AR ROUZ, Kelenner Keltiek, 17, rue Anatole Le Braz, Raozon (Ille-et-Vilaine).

BARZED HA BARZEZED (BARDES ET BARDESSES)

D^r Charlez PICQUENARD (Barz Melen ab Ronan), La Forêt-Fouesnant.
 Gwill CORFEC (Bruglann), Stred Renan, Saint-Brieg, Breiz-Uhel.
 Erwann AR MOAL (Dirnardor), Coadout, tal Gwengamp, Treger.
 Fransez CAUREL (Evnik Arvor), Saint-Thegonnek, Leon.
 Gaston ESNAULT (Kistinen Vor), Kelenner, Lycée Janson de Sully, 190 bis, boulevard Pereire, Paris (17^e).
 Jos ALBARET (Ar Bruger), 15, rue de Dinan, Raozon, Breiz-Uhel.
 Jord Ar. RUMEUR (Mathalizi), Azay-le-Rideau (Indre-et-Loire), Bro-C'hall.
 August BOSCHER (Ar Yeodet), Sant-Servez, tal Kallag, Kerne.
 André DEGOUL (An Hader), Stred Belle-Fontaine, An Oriant, Gwened.
 Fanch GOURVIL (Barr-Ilio), Ti Breiz, Montroulez, Léon.
 Erwan DANIEL (Dredaner), rue Porjou, Saint-Jean-Grâces, Gwengamp, Treger.

Loeiz GOURLET (Bodspenn), Moëlan, Kerne.
Daniel BERNARD (Potr ar C'hap), Ti ar Postou, Kemper, Kerne.
Per GUEDES (Bodfô), Kerhoen, Kastellin, Kerne.
Yann-Loeiz GAREL (C'houl Dero), Stred Clohars, Kemperlé, Kerne.
Per MOCAER (Gwas Eusa), 46, quai de la Douane, Brest, Léon.
Loeiz an DISSEZ, Kastell-Poll-a-Leon, Leon.
Alan BRENÉOL (Alanik Armen), Ti-Skol Mainneville (Eure), Bro-C'hall.
Iwan AR BEK (Iwan Roskornaou), bourc'h Poullaouen, Kerne.
Arzur de DIEULEVEULT (Arzur Breiz), Maer, Dirinon, Leon.
Emil CUEFF (Kaner Léon), Pont-Aven, Kerne.
Euzen AR ROUZ (Evnik Pennarc'hoat), Gwerleskin, Bro Dreger.
Per AR SAUZ (Bleun benal), Kernascleden, Gwened.
Yann AR GALL (Ab Sulio), 48, Stred ar C'hastell, Brest, Léon.
Francis MOAL (Alc'houeder Leon), Kastell-Pol, Léon.
Fanch STEFAN (Alc'houeder Kreizker), Kastell-Pol, Léon.
Job KERGRIST (Barz Arvor), 26, Stred ar Gigerez, Naoned, Breiz-Uhel.
Hervé AR MENN (Diskejenn), 96, rue du Poteau, Paris (18°).
Konstanza AR MERER (Laouenanig ar Roz), Lanvaëleg, Treger.
Yvona GALBRUN (Erwanez), Bear, Treger.
Emonik COARER (Kalondan), 10, chem. des Propriétaires, rue Renan,
Naoned (Loire-Inférieure).
Heloïsa RUSSELL-FERGUSON, Forum Club, 6, Grosvenor Place, London,
Bro-Saoz.
Iñk MOAL, archer a bolis, Menez-Paol, Lambézellec, Brest.
Stanislas MILBÉO (Staniely), 63, rue Rebeval, Paris.
Marcelle TANGUY (Gwennigell), bourc'h Poullaouën, Kerne.
Gait BRISSET-LE BIHAN (Huiderig ar Segaleg), 118, rue des Hauts-
Pavés, Nantes (Loire-Inférieure).
Erwan FOURNIS (Breutaër), quai Brizeux, Quimperlé.
Doktor Eugène STEPHAN, mezig, Roskoff.
Yann BOTHOREL, apotiker, Huelgoat.
Fanch JAFFRÈS (ar Mesaër), labourer douar er Gorreker, Folgoet, Bro
Leon.
Renan PERENNÈS, Kaner fentus, 44, rue de la Chapelle, Paris (18°).
Raphaël KERISIT, Kemwerzer, Audierne (F.).
Herveik CÉVAËR, Kemwerzer, 76, rue Carnot, Lorient.
Loeiz ER STEVAN, labourer-douar, rue Kerdavid, Lanester, Bro-Wened.
Yann APRIOU, savour-tier, 67, rue Emile-Zola, Brest.

OVEDED (OVATES)

D' Olier SAGORY (Olier Barr-Avel), Moncontour, Breiz-Uhel.
Moris NICOLAS (Mab ar Gwenn), Naoned, Breiz-Uhel.
Moris AN DAULT (Leorlenner), boulevard Kerguélen, Kemper, Kerne.
D' Jord PLATEAU (Dentaouer), Stred Sant-Gwillerm, Sant-Brieg, Breiz-Uhel.
Loeiz GOBLET (Yann Mor-Vran), 178, rue de la Pompe, Paris (16^e).
D' Yann LETTRY (Mab Gweltas), Stred ar Porz, An Oriant, Gwened.
Yann CHOLEAU (Yann Kerper), 46, Stred Poterie, Vitré, Breiz-Uhel.
Pol LADMIRAULT (Oriav ab Millio), 13, rue du Roi Albert 1^{er}, Naoned, Breiz-Uhel.
Iwan ar BODOLEK (Korrik ar c'hoat), Tachen ar C'houhi, Kastellin, Kerne.
D' Loeiz DUJARDIN (Loeiz Lokournan), Sant-Renan, Léon.
Renan QULLIVIC (Menkaled), 73, boulevard Montmorency, Paris.
Yann-Fransez CRENN (Kado Gwernarborn), Loperek, Kerne.
August Ar GALL (Er C'hoedour), Kamorz, Gwened.
D' Léon PALAUX (Mab ar Mor), Bais (Mayenne), Bro-C'hall.
D' Yann PERQUIS (Yann Gaouan), 7, Stred Bertrand, Razon, Breiz-Uhel.
D' Edward GUEGUEN (Ieot Mor), 36, avenue du Plessis-la-Musse, Naoned.
Erwan LOPEZ (Mab an Tornaod), Mael Keraez, Kerne.
August SOLU (Eostik Kerne), Hent-Houarn, Keraez, Kerne.
Yann BALLU (Konsort Alan Barveg), 1, rue de Feltre, Naoned, Breiz-Uhel.
D' Moris GRAVOT (Renour Iaoankiz), rue Nationale, Pontivy, Gwened.
Erwan PENANHOAT (Skrill Koat an Noz), Perros-Guireg, Treger.
Adrian ALLAIN (Pellgomzer), 6, rue Barthélemy, Paris.
Gildas JAFFRENNOU (Gweltas), Keraez, Kerne.
Yann-Jelvestr POURDIEU-LE COZ, relieur, Lannion.
Yann-Mari MARTIN, sekretour Ti Ker, Plestin-an-Trez (C-du-N.).
Gweltas AR BOURG, villa Brise-de-Mer, Paramé (I-et-V.).

DISKIBIEN (DISCIPLES)

Yann GIVERN (Eostik Gwalarn), Ar Faouet, Gwened.
Gwenhael HERRIEU (Gwenhael), Sant-Karadeg, Gwened.
Hervé DEGOUL (Hervé), An Oriant, Gwened.
Armel DIVERRES (Arz Mael), Abertawe, Bro-Gemrl.
Bastian KERAVAL (Ab Nael).
Herri CAOUSSIN (an Alarc'h), Scrignac, Kerne.
André LAJAT, Naoned.
Ronan CAOUISSIN, Pleyber-Krist.
Erwan TOURBIN, Pleumeur-Bodou, Treger.
Marie AN TOAZER, Perros-Guireg.
Roger PRAUD DE LA MONNERIE, Le Mans.
Per LOISEL, Josselin (Morbihan).

BARZED A ENOR (BARDES D'HONNEUR)

Jules HAAG (eus Sant-Brieg), gazetenner en Paris.
 Doktor ODEYE, Maër, Lesneven, Léon.
 Emil HAMONIC, tolenmour, Sant-Brieg, B. U.
 O.-L. AUBERT, Renour ar Gambr a Gemwerz, Sant-Brieg.
 J. WARON, maer koz, Sant-Brieg.
 Elie AR GOFF, Kizellour, Sant-Brieg.
 Olier GUYON, Gazetennour, Sant-Brieg ha Paris.
 AR BAUDOUR, Maer Pedernek, Treger.
 Doktor Herri VERGNIAUD (Gwernaot), bet Eil-Maer Brest.
 Jacques POHIER, Tolennour, Ancenis, Breiz-Uhel.
 Paul CAILLAUX (Gwenhael), Sekretour Ti Ker, Naoned, Breiz-Uhel.
 Charles BELLANGER (Difennour Breiz), 5, impasse S. Roch, Le Havre (S.-I.).
 Guillaume HEMON, Eil Maër, Locronan, Kerne.
 DESJACQUES, Diwaller Mirdi, Hennbont, Gwened.
 Paul AR SKOUR, Stred Anatole-France, Lambazellec.
 Léo PERUTZ, Skrivanier, Porzelangasse, 37, Vienne, Ostrich.
 Alphonse RIO, Senadour ar Morbihan, Kiberon.
 Lionel HUETTE, Maer an Alre, Gwened.
 AR VISAGE, Maer Lokmariaker, Gwened.
 Job GESTALIN, Marc'hadour Istr, La Trinité-sur-Mer.
 Markiz de la MOUSSAYE, Lamballe, Breiz-Uhel.
 Corentin AR FLOC'H, Maer Huelgoat, Kerne.
 Roland DORGELES, Romancher, 6, rue Jean-Goujon, Paris (8°).
 Erwan de BOISBOISSEL, Koronal, Saint-Nikolas-ar-Pelem, Kerne.
 August ar BONNIEC, Maer Saint-Nikolas-ar-Pelem, Kerne.
 Yann ar GUYADER, Konsailler Rannvro, Saint-Nikolas-ar-Pelem, Kerne.
 Kamill ar MERSEER ERM, Skrivanier, rue des Casinos, Dinard, Breiz-Uhel.
 Euzen AN ISSILOUR (Eostik Ranz), Skrivanier, Dinan, Breiz-Uhel.
 Yann CADIC, Sekretour Kevredigez Bretoned Paris, 39, boulevard Montparnasse.
 Jul-Charles AR BOZEC, Delouennour, Mellionnek, Kerne.
 RIGUIDEL, Maer ar Faouet, Gwened.
 Ludovic BARGAIN, Noter, Ar Faouet, Gwened.
 Doktor JEGOUREL, Maer koz, Pontivi, Gwened.
 Emile LEMOIGNE, Renour Gouellou Pontivi, Gwened.
 Emile GILLES, Renour Syndicat d'Initiative, Pontivi, Gwened.
 Euzen FROTTE, Kemwerzour, Maër, Pontivi, Gwened.
 Per ROPERT, Kemwerzour, Pontivi, Gwened.
 Euzen CORGNE, Kelenmour, Lycée Pontivi, Gwened.
 KERDRAIN, Renour Bank ar S. G., Pontivi, Gwened.
 DUCLOS, Tenzorer ar Genvreureiz Labour-Douar, Pontivi.
 BELGUIL, Kabiten retretet, Pontivi, Gwened.
 Louis LE PRIOL, Gazetennour, Pontivi.
 Per CADRE, Tolennour, Enez ar Ger-Veur.
 J. A. SANSEAU, Krouer Korollerien Breiz-Izel-Paris, Nanterre (Seine).
 Adrien DELAVIGNE, Ijinour, 3, rue Félix-Thomas, Naoned, Breiz-Uhel.
 Yann AR FLEMM-AN ARVOR, Muzikour, 2, rue Docteur Roux, Ar Mans (Sarthe).
 Raymond AR ROC'H, Renour Bretoned Clamart, 5, allée Louise, Clamart (Seine).
 Sir ROBERT MOND, eus an Institut de France, Benac'h ha Londrez.

Marius JOUVEAU, Capoulié ar C'hreizdeiz, Aix-en-Provans.
 Per AZÉMA, Félibre Majoral, Montpellier (Hérault).
 Pierre FONTAN, Félibre Majoral, Musée des Arts, Toulon (Var).
 René JOUVEAU, Kelenmour en Lycée, Carpentras.
 Jacques HEUGEL, Levrier-Embanner, 2 bis, rue Vivienne, Paris (2°).
 André SAVORET, Skrivanier, 36, rue du Bac, Paris (7°).
 Louis AN DALL (Rouzik ar Menhir), Landreger, Treger.
 Pierre Ar SELLIN, Beaour a gemwerz, 12, rue Eugène-Sue, Paris.
 Jean KERGOURLAY, 28, avenue de la Mairie, Larue-Chevilly (Seine).
 Louis BEAUFRÈRE, dir. de *La Bretagne à Paris, en France, aux Colonies*, 15, rue du Faubourg Montmartre, Paris (9°).
 Albert DUFOUR, Pennrener Bretoned Toulon, 13, boulevard de Tené, Toulon (Var).
 Henry BLANDIN, Renour Syndicat d'Initiative, Plestin, Treger.
 Commandant BOUJEANT, Plestin-an-Trez, Treger.
 Commandant Joseph JACOB, Beauport, Plestin-an-Trez, Treger.
 Louis LE GALL, Maër koz, Ker-mab-Husson, Plestin-an-Trez, Treger.
 Roger BRANDILY, 14, rue Gramme, Paris (15°).
 Yves GERMAIN, barnier, Les Andelys (Eure).
 Jean SUSCINIO-TEXIER, 3, rue Georges-Berger, Paris (17°).
 François QUÉMENT, Maer, Roscoff.
 Docteur LEFRANC, clinique, Roscoff.
 François GUIVARCH, assurances, Roscoff.
 SAOUT, Maer, Ile de Batz (Finist.).
 Charles GARNIER, pharmacien, président Soc. des Régates, Roscoff.
 Yves LE DEROFF, Rhun, Roscoff.
 Alain LE LOUÉDEC, Maer, Quimperlé.
 STAFFORD, directeur des papeteries de l'Isle, Quimperlé.
 Maurice HABRIAL, président du Comité des fêtes, pharmacien, Quimperlé.
 Jean LE GALL, directeur de l'Union Agricole, Quimperlé.
 Louis TRÉGUIER, garagiste, Quimperlé.
 G. HOTTE, président des Médailles Militaires, Quimperlé.
 Joseph LE ROC'H, président de l'U. S. Q., Quimperlé.
 Henri LÉON, vice-président de la F.A.L.S.A.B., Gourin.
 Joseph PEYRON, membre de la Commission des fêtes de Quimperlé.
 Jean LE DOARÉ, notaire, Plomodiern.
 Pierre QUINTIN, publiciste, 7, rue Dubois des Sauzays, Rennes.
 Yann Moris TOURON (Blei er Goriniz), professeur, 15, rue Saint-Vincent, Fontenay-sous-Bois (Seine).
 René BARBIN, dir. du journal « *L'Epoque* », 9, rue Ernest-Cresson, Paris (14°).
 William LOTH, ingénieur, 20, avenue Kléber, Paris.
 Eugène RAUDE, maire de Guéméné, 129, rue de la Perrière, Lorient.
 D^r Vincent DONIAS, Guéméné-sur-Scorff.
 Paul LE BOURLAIS, négociant, Guéméné-sur-Scorff.

BARZEZED A ENOR (BARDESSES D'HONNEUR)

GRAGEZ an Drouided, ar Varzed hag an Oveded, hervez ar *Reizadur*.
Dimezel Marie CHOLEAU, Vitré, Breiz-Uhel.

Dimezel Martha AR BERR, Raozon, Breiz-Uhel.

Itron BASTIT, Huelgoat, Kerne.

Itron Loeiza BRIGANT-FLEOUTER (Kanerez Kerne), 13, rue Marie-Stuart,
Paris (2^e).

Itron Kontez DE BOISBOISSEL (Telennourez ar Pelem), Sant-Nikolas-
ar-Pelem, Kerne.

Itron Kontez Genovefa A SANT-PER (Brug ar Mene-Du), Sant-Brieg,
Breiz-Uhel.

Itron Suzik MORVAN (Kanerez Breiz), 15, rue Maître-Albert, Paris.

Dimezel Mari RIVOALAN (Breizadez), Sant-Nikolas-ar-Pelem, Kerne.

Dimezel Yvette BRELET (Golvanig an Ti-Plouz), 10, chemin Richeux,
Naoned, Breiz-Uhel.

Lady Maï MOND-AR MANAC'H, Benac'h, Paris, ha Londrez.

Dimezel Janed A GERVENOEL, Talhouet, kichen Pontivi, Gwened.

Itron Nouno JUDLIN, Skrivanierer provansek, Carros (Alpes-Maritimes).

Itron Olier VALLÉE, Milin-Baper, Lok-Maria-Benac'h, Treger.

Dimezel AR GUILLOU (Teuzig al Lann), 79 bis, rue Edgar-Quinet, Naoned,
Breiz-Uhel.

Itron DE L'ESTOURBEILLON (Rozen Riou), maner Penhoët, Avessac
(Loire-Inférieure).

Dimezel Gaïd CORVAISIER, 44, rue des Vallées, Fougères (I.-et-V.).

Itron SANSÉAU, 14, rue Gounod, Nanterre (Seine).

Dimezel Adrienne CHARUEL-LOGUIVY, arzourez, Naoned.

**DROUIZED, BARZED, OVEDED MARO
(DRUIDES, BARDES, OVATES DECEDES)**

Per PRONOST (Barz Treflez), en Brest, en 1909.
Yann AR FUSTEK (Lemenik ab Gwillerm), en Paris, en 1910.
G. DE MENORVAL (Ab Pentier), en Kintin, en 1913.
Loeiz AR MENN (Ar Pagan), en Guik-Seni, en 1914.
Jos NIKOLAS (Ar Bigouden), en Paris, en 1914.
Victor Nouel KERANGUE (Ab Erwan), war an talbenn, en 1915.
Charles GWENNOU (Talhouarn), en Vitry-sur-Seine, en 1915.
Jos PARKER (Kloarek Kerne), en Fouësnant, en 1916.
Yann-Per CALLOC'H (Bleimor), war an talbenn, en 1917.
Amédée AR C'HOZIK (Karedik), war an talbenn, en 1917.
Hippolyte LATERRE (Bodlann), en Keraez, en 1918.
Gregor DELAFARGUE (An Tremener), en Lanvollon, en 1919.
Loeiz AR BARK (Mab an Arvor), en Naoned, en 1920.
Klaoda AR PRAT (Pluenzür), en Kermaria-Sulard, en 1926.
Guillerm AR BORN (Barz Seglian), en Seglian, en 1927.
Théophil GUYOMARC'H (Tonton Phil), en Montroulez, en 1929.
Fanchik ABGRALL (Alc'houeder Arre), en Bodveur, en 1930.
Yvon CROCQ (Eostik Kerinek), en Brest, en 1930.
Leonik AR BOUCHER (Pabor Kerne), en Villeneuve-le-Roi, en 1931.
Erwan BERTHOU (Kaledvoulc'h), en Pleuvian, en 1933.
Kaourantin TOSSER (Kaou), en Kemper, en 1933.
Herri JENNER (Gwas Mikaël), en Kerne Saoz, en 1934.
Job VILLARD (Skeudennet), en Kemper, en 1935.
Charles COTONNEC (Paréour), en Kemperlé, en 1935.
Yann-Mari KERMARREC (Pintik Pagan), en Saint-Ouen, en 1935.
Charles AR BRAS (Drouiz Keraez), en Keraez, 1936.
Eugène D'HERBLAIS (Marc'heg Arvor), Faouët, Lanvollon, 1936.
Herry DE LA GUICHARDIÈRE (Telen Aour), Quévert, 1936.
André MELLAC (Gwenedour), An Oriant, 1936.
Loeiz AR FLOC'H (Stourmer), Lesneven, 1936.

**BARZED HA BARZEZED A ENOR MARO
(BARDES ET BARDESSES D'HONNEUR DECEDES)**

An Itron JAFFRENNOU (Anna ROPARS), en Karnoet, en 1913.
Louis DELOBEAU, Senadour ha Maer koz Brest, en Brest, en 1915.
Louis ESCOT (Mab Ronan), en e vaner La Ricoulière (Maine-et-Loire), en 1915.
Louis SOUBIGOU, Kanned koz ha maer Lesneven, en Lesneven, en 1915.
Théophil NICOL, bet eil maer Lesneven, en Lesneven, en 1916.
Ange BOULVARD (Mab Brieg), Kemwerzour, en Brest, en 1916.
An Itron Ange MOSHER (Bretonez Tramor), en New-York, en 1917.
An Itron Kontez DE PESQUIDOUX, en Kevrt tal Dinan, en 1918.
An Abad Jean BRELIVET, en Paris, en 1918.
Louis COUDURIER, Gazetennour, en Brest, en 1921.
Doktor PITON, Mezegour, en Brest, en 1922.
Pierre GUIOT, bet Avoué, en Gwengamp, en 1923.
An Itron JOSSIC, kemenerezh, en Kiberon, en 1930.
Paul BELLAMY, bet Kannad ha Maer, en Naoned, en 1930.
Markiz KEROUARTZ, bet Kannad, en Gwengamp, en 1930.
Herri SERVAIN, bet Senadour ha Maer, en Sant-Brieg, en 1931.
An Itron Huchet de CINTRÉ, en Bruz, en 1931.
Ar Beskont YANN DE SAISY, en Riek, en 1933.
J. AR PENVEN, Kizeller koat, Pontivy, 1934.
Ambroise GUILLOU, maire, Plestin-les-Grèves, 1935.
Job AR BIHAN-KERSCAU, Huelgoat, 1935.
Léon COLLIEC, Quimperlé, 1936.

ALIOU (AVIS)

An Ezili oberiant hag enorus o deus gwir da gaout eur Paper Testeni.
Ar spilhenn driliou a vez kaset evit 20 real. — Ar Reizadur, evit 20 real.
Ar skodenn d'ar Skol Veur a zo 10 lur ar bloaz.
Ar re c'hortozo an drêtenn a baëo gant ar mizou ouspenn : 15 lur.
Ar gourizou a zo da baëa 5 skoed. — Evit ober saëiou, en em erbedi
ouz ar Varzez Gwennfrewi, en Kiberon, Gwened. — Ar gedourien a renk
en en ziskleria arok ar I a viz maë, hag ar Pouellgor a zo galvet da
vouezia.

Les membres actifs et honoraires ont droit au Diplôme de leur titre.
L'insigne Triadique leur est adressé contre 5 francs. Le présent livret
contre 5 francs.

La contribution au Collège est de 10 francs par an.

Les cotisations recouvrées par la poste sont de 15 francs.

Les écharpes se paient 15 francs. — Pour faire les Toges, s'adresser
à la Bardesse Gwennfrewi, à Quiberon, Morbihan. — Les candidats doivent
se déclarer avant le 1^{er} mai, et le Pouellgor est appelé à voter.

N° du Compte Chèques Postaux : 106.95 Rennes (Jaffrennou).



PEDERVED MOULADENN
EMBANNET GANT SKOAZEL ARMORICA
RAOZON, 1937
IMP. DE LA PRESSE RÉGIONALE DE L'OUEST

ALI

Ar REIZADUR-ma ha ROLL an ezili eus ar GORSEDD a dlee
ober lod eus eul levr bras e hano MELEZOUR AR VARZED e
oat o sonjal embann, mar bije kavet awalc'h a ragskriverien.
El levr-ze e oat en sell da gonta istor ar Skol-Veur, ha da rei
eun tres eus oberou pep Ezel, o foltrejou hag all.

Evel n'eus ket kavet an niver ret, eo bet dao tremenn gant
bihanoc'h.

LEVRIOU a alier prena evit deski lenn ha skriva BREZONEG

Le breton en 40 leçons, gant VALLÉE : 15 fr. Prudhomme, Sant-
Brieg.


Mots français et bretons classés d'après le sens, gant VALLÉE,
2 levrenn, 22. lur. Armorica-Keraez.

Gériadurig brezonek-gallek, gant ERNAULT. Prudhomme, Sant-
Brieg, 20 lur.

Grand dictionnaire français-breton, gant VALLÉE : 75 fr. griet ;
100 lur kloriet. Impr. Commerciale, rue des Francs-Bourgeois,
Rennes.

Méthode bilingue, gant AR BOZEC ; 10 lur. Imp. Breiz, Guingamp.

Grammaire et exercices du dialecte de Vannes, gant GUILLEVIC
kag AR GOFF : 15 l. Imp. Libr. Lafolye, Vannes.



AR GORSEDD DIGOR